

Ar sorcerez.

me ne moa ket hoas pemzek bло^a
 ag a woar(1) desket mad
 a ouie kana ar prefaç
 Kouls ag an ofern bred.

Konsacri an ostiou d'in ma vije permetet

— Liverit tu dime plachik gant piou o c'heus desket
 ar secrejo pere ouzoc'h pere a leveret.

— Gant eur sklolaer yaouank er gher en ti va zad
 em kasse gantan beb nos da klevet ar sabad.

Kenta ma klevis ar sabad me a voa souezet
 ho klevet ar sorcerien ag ar sorcerezet
 ho c'helvel dre o louzou evit Goali an ed.

Kenta ma aprouvis ma louçou
 da welet ag hi woa mad

e woa var eur goarimad segal
 er ger en ti va zad.

nag a woa ed de adda na trivarc'h boezeled
 ha ne voa ked bed a nezan trivac'h skudellad mad.

me meus eur c'houffrik bahut er gher en ti ma zad
 Piou benag en digoro en devo kalonnad.

a zo enan teïr aër viber o viri eur serpent
 ag e devoro ar vro man tout en antieramant

Mar deus va teïr aër viber da ober eur blaves mad
 e rankin bea kunduet gant boued dilikat.

nen deo ket gant kig klujar na gant kig kevelek
 gant goad ar vugale munut, kig an innoçantet,

Kassit va c'hoffrik bahut en eur fark a tri korn
 Lakit an tan den dewi a pelaît diontan.

Me ia breman dar maro pa em boa miritet
Balamour dam sorcerejou pere am moa desket.

Anaïc Cozic, mendiant de Taulé, 9bre 1850.

(1) *D'abord voa : le 1er jambage du -w- (de woar) a été ajouté ainsi que l'r final.*